



Bloavezh an Heol-Splann



Staliañ an itrik

Kaheg a selle ouzh ar prenestr. A-fet prenestr e oa kentoc'h ur voger wer. Eus e vurev e c'halle teurel ur sell war e gêr-benn a-bezh. Ur gweledva 360° war al lec'h ma veve an darn vrasañ eus e sujidi. Kerork... kêr-benn Liesi. Kement a vloavezhioù war evezh, kement a stourmoù, a aberzhioù ! Met deuet e oa a-benn da sevel ur vro unanet, frank hag e peoc'h. E zaou vetr ha daou-ugent a greñvae ar santimant a c'halloud divuzul. Daoust d'e zremm, pe a-drugarez dezhañ, e vage nec'h ha doujañs war un dro. Un dremm disliv ha lintr ne veze distreset nemet gant div linenn a dalveze da zaoulagad, ha div all da vuzelloù. Pet mojenn warn-ugent en doa klevet diwar e benn e-pad ar bloavezhioù-se ? Darn a lâre e oa-eñ ar ramz diwezhañ, darn all a soñje dezhe e oa bet krouet gant ar gorred evit boueta o egar gounid. C'hoazh en doa klevet a-gleiz hag a-zehoù e teue eus an egor. Ar re-se a lakae anezhañ da zoue. Hag evit lâret ar wirionez, ne oa ket displijet gant ar soñj-se. Desket en doa, forzh penaos, ober gant kredennoù an dud : « Keit ha ma kredont ne oaront ket. » Setu ar pezh en doa respontet d'e guzulier hag a oa ankeniet gant an holl draoù a veze lâret diwar e benn e straedoù ar gêr-benn. Met eñ e-unan ne ouie ket hiroc'h.

Ne fiñvas ket Kaheg pa glevas ar bignerez oc'h erruout. Goût a-walc'h a rae piv a oa o tont, ha kement-se ne blije ket dezhañ. N'en do ket cheñchet. Gwisket e du, e gabell gantañ war e benn, evit chom hep diskouez e zremm, nebeut a c'herioù o tont er-maez eus e c'henoù. Bihan e oa, keñveriet ouzh ar re a veze graet Mab-den anezhe zoken. Ne oa den evit gouzout resis eus peseurt gouenn e oa an hini a veze graet "Ar Skeud" anezhañ. Gouest e oa da vezañ lakaet da n'eus forzh peseurt hini pe dost. Ar pezh, just a-walc'h, a rae dezhañ bezañ gwellañ spier Liesi.

Stummet e oa bet Ar Skeud gant ar re wellañ. Ar re o doa degaset anezhañ d'e gelennerien a oa bet lazhet kerkent evit derc'hel kuzh orin ar babig. Ar vabiged, kentoc'h. Ur gwir skol spierien ha muntrerien a oa bet savet gant Gerat. Mignon muiañ-karet Kaheg, evel e vreur... Petra e oa-eñ deuet da vezañ ? Den na ouie. Kaheg eo en doa roet ar gefridi-se dezhañ.

8

— Kae da gavout ar vuntreien diouzh ar penn. Ha laka anezhe da dreuzkas o arz. Den na zleo gouzout ez eus eus an aozadur-se. Kav ul lec'h pell ha didud. Lazh ar re a c'hallfe komz. Ha kas din an hini gwellañ eus an deskarded. Eñ eo a zifennno ar vro-mañ ouzh he disprizerien. Ha d'ar poent-se, ma mignon, ne chomo mann eus an aozadur-se.

Feal e oa bet Gerat. Fealoc'h ne oa ket. Erruet e oa Ar Skeud, un deiz, en ur lâret d'e Roue ne chome mann eus ar pezh a oa bet savet gant Gerat. Ne ouie ket Kaheg pelec'h e oa bet staliet ar skol daonet-se zoken. En em c'houlenn a rae ar Roue, a-wechoù, hag-eñ e oa bet lazhet e vignon gant Ar Skeud. E c'halle bezañ. Met un amzer all a oa an amzer-se. Pegeit e oa en doa kinniget e guzulier an den-se d'ar Roue hollc'halloudus ? Meur a guzulier

a oa bet abaoe an deiz-se. Daoust hag e oa bepred ar memes Skeud eo a laboure evitañ ? Ne oa ket gouest da lâret zoken. Goût a rae-eñ pep tra war e damm douar koulskoude... Ne c'halle ket tostaat ouzh an den-se. Ne c'halle ket en em zizober dioutañ kennebeut. Bepred e tegouezhe en e vurev a-raok na vefe galvet. Evel e skeud. Evel pa vefe en e benn. Aon-bras en doa rakañ, a soñje dezhañ. Kar ne oa ket sur Kaheg da c'hoût petra a oa an aon.

Hag hirie c'hoazh e oa leun e galon gant ar santimant-se pa baouezas ar bignerez. N'en doa ket ezhomm da dreñ e benn evit gwiriañ hag-eñ e c'hline Ar Skeud dirakañ. Graet e oa a-raok bezañ war wel.

— Gouzout a rez petra a chal ac'hanon, a lâras Kaheg gant e vouezh dous ha plaen en ur sellet ouzh monedone ar c'hirri-aer e straedoù Kerork.

— ...

— Ur vojenn a c'hallfe bezañ... a zle bezañ. Kar n'hall ket Ar Skeud c'hwitañ war e gefridi.

Un trouzig o talvezout da respont. Gwiad o frotañ. Ar Skeud a fiñv un disterig gant an hegaz. Minc'hoarzhin a ra ar Roue.

— Ur maj, Ar Skeud... Goût a-walc'h a rez ne zlefe ket chom hini ebet. Kae dre ar vro. Ha na zeuez ket endro e-keit ma chomo unan anezhe.

— Ma Roue... a chuchumuchuas Ar Skeud a-raok mont diwar wel gant ar bignerez.

Huanadiñ a reas Kaheg. Ur maj... gwashañ gouenn a oa. A-enep ar re-se en doa stourmet. Ha setu int endro. Kement a vloavezhioù, kement a aberzhioù. Evit petra ? Azezañ a reas ouzh e vurev ha pouezañ a reas war ar bouton a dalveze da gloc'hig evit gervel e guzulier.

Ar c'horr a zeuas war wel ur prantadig war-lerc'h.

— Penaos e c'hall an dister korr-se ho servijout, ma Roue ? a c'houlennas Hemk'An.

— En ur baouez gant ar formulenn-se, evit kregiñ ! a huchas Kaheg, aet en arfleu.

— Ma digarezit, Aotrou Roue, a respontas ar c'horr en ur dostaat ouzh ar burev a gammedoù diasur. Gouzout a ouezit ez on bet desavet evel-se.

— Ma revr ganit, Hemk'An ! Lâr din kentoc'h petra a soñjez eus an afer-se... Ar wech kentañ e vefe d'Ar Skeud c'hwitañ war e gefridi. N'on ket evit krediñ.

— C'hwi a oar, ô Meurded meurdezus... n'eus den na mann evit anaout ho hentoù...

— Paouez gant se, Hemk'An. Goût a-walc'h a ran ne blij ket dit e laoskfen ar sujidi da grediñ on un doue. Komzet hon eus eus se meur a wech. Ne cheñchin ket ali. Graet eo ma soñj da vat.

— Ha koulskoude, ma Roue a gren dirak ur maj a netra. An hudouriezh a zo en holl draoù. A-wechoù e-barzh ul loen pe ur blantenn, a-wechoù e-barzh un den. Kaer ho po klask, ne c'hallot ket distruj anezhi hep distruj Zadbora en he fezh.

— N'on ket a-enep an hudouriezh, korr a netra. A-enep ar vajer ne lâran ket. Distrujet em eus o bed... n'eo ket evit leuskel anezhe da zont en-dro !

Azezañ a reas Hemk'An e-barzh tron ar Roue, kalz re vras evitañ. Klask a reas ur stumm klet d'en em lakaat met sevel a reas en e sav o parañ selloù garv war e vestr :

— Bed an holl a oa ar bed renet gant ar vajer. Ar pezh ho poa distrujet eo bed an holl...

— N'emaout ket o vont da gregiñ en-dro gant da gentelioù, Hemk'An ! N'eus forzh penaos n'emañ ket aze

an dalc'h... Ar Skeud an hini eo. Ne 'm eus ket fiziañs ennañ ken. Lazhañ anezhañ a fell din ober, an abretañ ar gwellañ.

— A ! A ! A ! C'hwi ? a estlammas ar c'horr war an tron. Peg eit zo n'ho peus ket kemeret buhez un den, Aotrou ? Soñj ho peus penaos e vez graet ? Hag eus Ar Skeud emaomp o komz, ma Roue intret.

— Peoc'h ganit ! Evel-just on intret ! Ur Roue on ! Kas da rouedad en-dro, korr displeg. C'hoant em eus da c'houzout kement bramm a vez laosket er vro hag en tu all d'hor bevennoù.

Ur minc'hoarzh makiavelek a lakaas daoulagad ar c'huzulier da lugerniñ, leun a zrougoberiantiz. Ul lamm ouesk, ha ne glote tamm ebet gant e zoareoù boas, a reas Hemk'An war ar burev, hag eñ da strewiñ paperajoù ar Roue war al leur. Ur stouadenn bounner a reas war-zu Kaheg :

— Ho polontez bezet graet, ma Roue.

Lammat a reas en-dro e-traoñ ar burev ha kerzhet a gammedoù diasur betek ar bignerez. Ger ebet ken ne voe eskemmet etreze o-daou. Selloù ne lâran ket. Ha ma vije bet klevet an diviz-se gant unan all en dije komprenet, sur a-walc'h, e oa ul liamm etre an daou voud-se kalz donoc'h evit ar pezh a veze diskouezet d'ar bobl.



Bloavezh an Heol-Splann



Ar Mesiaz pinvidik

12

Abaoe un nebeud devezhioù e oa diaesaet annezidi straed Toull-ar-Gazhez. Un hent-dall a oa eus ar straed-se ha gant se e oa evel ur gêriadenn hec'h-unan, ur c'hant metr a hirder, war un dek metr a ledander. Sed aze ma oa bet savet savadurioù pemp estaj anezhe, buan hag aes, goude ar Brezel Bras, ma oa bet disammet ar bed diouzh dalc'h ar vajer.

Savet e oa bet Kerork war ludu al lec'h ma veze ar ouenn divalav-se o ren didruez war ar bed. Anat e oa evit annezidi straed Toull-ar-Gazhez e oa o Roue divarvel, o Doue, deuet war Zadbora eus ar stered evit dieubiñ anezhe ha gwalc'hiñ ar bed eus pec'hedoù ar vajer.

Charlez a oa anavezet evel "Furnez ar C'hazh", ar C'hazh o vezañ straed devotañ Kerork. Met pa selled a-dostoc'h ouzh annezidi ha straedoù Kerork e oa Toull-ar-Gazhez ar straed nemeti ma veze gouestlet pedennoù d'an Doue Kaheg... ma veze gouestlet pedennoù d'un Doue bennak, zoken.

Hag abaoe un nebeud devezhioù e oa strafuilhet Charlez gant un afer. Pegen iskis ma oa relijion ar straed-se evit annezidi ar gêr-benn ne veze gwech ebet den ebet evit barn anezhe. Ober goap ne lâran ket, avat.

Bemdez-Kaheg¹ e kroge e zevezhioù er memes mod : dihunñ, trugarekaat Kaheg evit an devezh o kregiñ, gwiskañ e sae liv gwer-krokodil ha diskenn da draoñ an ti evit debriñ e zijuniñ a-dal Broeneska. Ez-ofisiel e oa ar plac'h-se ar Skoazellerez-Veur, da lâret eo sklavez Furnez ar C'hazh. Hi eo a rae pep tra evitañ. Pell zo en doa ankouaet liv ha stumm orin al legumaj a veze fardet gant karantez Broeneska. Kar ya, deuet e oa-hi da vezañ mestrez ar Furnez, met a-fet mestrez ne oa nemet an anv. Pa save Charlez e veze savet dija Broeneska abaoe ur pennad mat. Naet an ti, c'hwezh vat al lein o pignat ar skalieroù betek fronelloù ar gwaz a oa o ren e 50 vloaz hag eñ yac'h evel un tach c'hoazh. Hag ezhomm e oa ! Kar ne veze ket landreantiñ a rae Furnez ar C'hazh dindan un devezh ! Soñjit 'ta ! Kerkent ha lonket e zijuniñ ha bezañ bet trugarekaet gant e vatezh vuiañ-karet bezañ bet debret an holl draoù he doa fardet evitañ, e veze ret dezhañ treuziñ an hent. Dek metr a veze d'ober etre dor e di hag hini ar Bagodenn Wennvidik. Dek metr ha d'an nebeutañ dek den o klask resev ur jestr pe ur ger fur digantañ. Ne veze ket evit gwerediñ aze, er straed, hep bezañ intret gant furnez o roue Kaheg en a-raok. Digeriñ an nor hag he stlakañ war e lerc'h. Prientet e veze pep tra gant Broeneska : naetaet al lec'h, adstaliat an aoter gant ar peadra evit degemer ar Furnez. Ar Gral a veze lakaet e-kreiz an aoter, ar bizhier ezañs a bep penn eus an daol. Ne chome nemet da danañ anezhe, lakaat ar gwenterezioù da dreiñ, ha lonkañ hanterenn gentañ ar

1 *n.a.s.* Santout a reer amañ doujusted Zadbora : tu zo da envel un Doue dre e anv hep bezañ losket war aoter ar bilpouzerezh.

Gral. Pemp munutenn goude e veze prest Charlez hag ar Bagodenn Wennvidik da zegemer o feizidi.

Ar re gentañ a zeue tre evel un tropellad bevezerien dopet a serotonin, a veuze o empenn leun a vruderezh, da zevezh kentañ ar pilwerzh. Koulz lâret e oa ret dezhañ bezañ kousket mat, debret mat, ha graet mat war e dro gant Broeneska evit gouzañv kement a feiz o teverañ eus ene ar re deuet da selaou kentel Furnez ar C'hazh. Ha ne zeuent ket evit mann avat ! Kerkent ha ma tispake ar re gentañ e veze klevet e vouezh don hag uhel war un dro. Kregiñ a rae bepred en ur vont reut oute, kement ha diskouez piv e oa mestr al lec'h.

Div eur e pade e sarmon kentañ. Pep hini a gleve penaos e oa diskennet Kaheg eus an oabl, eus neblec'h, evit saveteiñ annezidi Zadhora. Ne oa ket da glask eus peseurt gouenn e oa an Doue, deuet da Roue evit heñchañ ar paourkaezh krouadurioù a veve war ar blanedenn bet krouet gantañ evit o mad dezhe. Ne oa ket da glask gouzout kar e oa-Eñ ur ouenn E-Unan, AR ouenn, «stad uhelañ ar Vuhez a rank pep hini ac'hanomp klask tizhout» evel ma lâre bemdez d'e zeñved. Goude an hir a brezegenn-se e treuze en-dro ar straed tra ma chome an dud er Bagodenn evit prederiañ war ar pezh o doa klevet, evit prientiñ o emgav gant Furnez ar C'hazh goude kreisteiz. Kar goude bezañ leuniet e gof hag e avu, e tistroe er Bagodenn Wennvidik da gejañ gante. An darn vrasañ ne c'houlennent nemet ur jestr, ur ger, peadra da vezañ frealzet war dazont o c'hroc'hen hag o ene. An darn all avat... goulennoù resis diwar-benn prezegenn ar beure, testenioù eus dic'hlanded Mab-den hag ar gouennoù all. N'ankouae ket reiñ soñj dezhe e vefe E bardon kenfeur gant o donezonoù a c'hallent

leuskel er pezh graet evit se, « war-ho-tu-kleiz-just-a-raok-mont-er-maez-trugarez ».

Met hirie e ouie Charlez en ur zihuniñ ne vefe ket un devezh ordinal. Abaoe daou zevezh e c'hoarveze traoù ne gomprenne ket ar Furnez. Hag evit ar wech kentañ abaoe ma oa bet diskuliet dezhañ e donkad a vesiaz n'en doa respont ebet da reiñ d'an holl a c'houlenne outañ : « Met petra ar maj² a zo o c'hoari en deizioù-mañ, ô Furnez ar C'hazh ? ». Mann ebet. Santout a rae Charlez e ved o krenañ koulskoude. Kaer en doa klask frealziñ an dud gant e c'herioù dibabet gant ar preder uhelañ e oa lañset AN dra, silet e spered e zeñved... an douetañs.

Deuet e oa evel-se. Ur beurevezh bennak e oa dihunet annezidi straed Toull-ar-Gazhez poazh o zeod, evel pa vije bet aozet ur pezh dirollerezh en derc'hent met den n'en dije soñj eus ar pezh a vije c'hoarvezet. Ar pezh a chome peg oute a oa an hunvre bet graet gante holl. An hurlink. Evel-just ne grede den komz eus an hunvre mallozhiñ o doa graet e-pad an noz. Ha Charlez an hini kentañ !

Marv Kaheg gant poanioù skrijus a oa bet diskouezet dezhañ er memes doare rik hag ar wech ma oa bet diskouezet dezhañ e gefridi neñvel. En em welet en doa o prezegenniñ dirak ur morad tud a veule anv Kaheg, a gane e vadelezh, a-drugarez dezhañ. A-drugarez dezhañ eo e ouife an holl piv e oa Kaheg. Met bremañ, ar memes doare hunvre en doa diskouezet dezhañ E varv. Ha ne oa ket brav da welet, ouzhpenn-se.

O klask kompren ster kuzh an hunvre-se e oa pa gomprenas e oa bet roet ar memes gweledigezh da dud all.

2 *n.a.s.* War hor planedenn dimp-ni e vefe lâret kentoc'h : « Petra an diaoul ».

Evel-just en doa soñjet lakaat an darvoud-se war chouk ar vajer, gouest da heñchañ hunvre an dud c'hlanan evit gwallsiañ o c'halon. Met splann e oa bet komzoù Kaheg, nebeut war-lerc'h Lid an Donedigezh – ma oa bet lakaet Kaheg da Roue madelezus ar vro nevez, anvet Liesi peogwir e vefe degemeret an holl ouennoù, hag int kevatal an eil ouzh eben. Ne chome maj ebet war Zadbora. Ar ouenn direizh-se a oa bet kaset da get. Echu e oa mare o ren war Zadbora, krouet e oa bet Liesi dindan levezon ar Saveteer Kaheg ha laosket ar broioù all en o aozadur.

An darn vrasañ anezhe a oa renet gant ur ouenn evit ur ouenn. Met levezon Kaheg a yae dreist da harzoù E vro ha degemerusoc'h-degemerusañ e oa annezidi ar broioù-se. War ar c'hevandir, da nebeutañ. Met lâret e oa bet gant ar Roue ne oa maj ebet ken war ar blanedenn a-bezh. Penaos kompren an hunvre a oa bet kaset da annezidi devotañ Kerork neuze ? Tri devezh goude en doa kavet Charlez petra lâret d'an dud e-pad e sarmon.

Ne lakaas ket kalz a youl evit debriñ an holl draoù bet prientet gant Broeneska. Chom a rae-hi da sellet outañ e-keit ma oa o tebriñ, dezhi da c'houzout petra a blije dezhañ ar muiañ diouzh an eur, an imor, an devezh... ret e oa dezhi bezañ an hini wellañ. Hi eo a rofe dezhañ ur mab da genderc'hel kefridi e dad. Evel-just he doa graet an hunvre-se ivez. Met n'he doa ket lâret d'ar Furnez. Mezhe doa, sur a-walc'h. Evel bemdez e tiskoueze bezañ dedennet gant he Charlez kentoc'h evit soñjal en he diaesamantoù dezhi. Ha souezhet bras e voe pa glevas mouezh Furnez ar C'hazh o sevel ar goulenn-se diganti :

— Ret 'vo din lâret un dra dezhe, Broeneska. Ha mat e vefe dit reiñ da ali din ?

Ar respont a resevas Charlez a voe daoulagad ront ha